

## D'ar 16 a viz Du

- Er IVre kantved, distro da Zoue sant Hil pe Nil eus Seez, eskob. Eus Bro-C'Hres e teuas evit gweladenniñ kumuniezhoù kristen Gallia hag e voe anvet eskob Seez.
- E 1242, sant Edmond, arc'heskob Kêrgent. Studiañ a reas en Oxford lec'h ma voe an hini kentañ o c'hounid ur Master of Arts, aet da bPariz e voe ur prezegour meur. Dre ma teue da vezañ brudet evit e feiz e voe urzhiet arc'heskop Kêrgent gant ar pab Gregor IX. Enebet ouzh Herri III a Vro-Saoz ez eas d'an harlu e Bro-C'Hall ma voe degemeret gant aroue sant Loeiz. Deuet war e gozhni ez eas e abati chalonied sant Eosten Soisy-Bouy nepell diouzh Provins, lec'h ma varvas.
- E 1093, e Edimbourg, ganedigezh en neñvoù santez Marcharid, rouanez Bro-Skos, merc'h-vihan roue Bro-Saoz. Paeronez Bro-Skos. Ganet e voe en Hungaria war-dro ar bloaz 1046, e-lec'h m'en em gave he zad harluet, e voe dimezet e 1070 da vMacCallum III (Malcolm) roue Bro-Skos. Gant kalz preder e tesavas o eizh bugel hep lakaat a-gostez he dleadoù a rouanez. Degas a reas al liderezh roman er vro. Mervel a reas un nebeut devezhioù goude muntridigezh he gwaz hag he mab henañ gant Normaned Bro-Saoz.
- E 1253 en Assizi, santez Oanez, abadez. C'hoar yaouer santez Klara e rankas mont a-enep he ziegezh evit mont da-heul sant Frañsez. Bez'e voe e penn manati Firenze hag e tiazezas re Venezia ha Mantova.
- E 1301 en Hefta, santez Gertruda, gwerc'hez. Bez' e voe manac'hez beneadat en abati Hefta er Saks lec'h ma voe grataet dezhi radoù kevrinel ha diskuliadurioù a-zivout Kalon Jezuz.
- War enezez Vreizh (Kembre), er VIvet kantved, sant Avan, eskob Llanafan.
- E 759, sant Otmer pe Omar, abad Sant-Gall en Helvetia. Lec'h m'en doa savet sant Gall un nevedan e savas ur manati hag un ospiti evit al lovridi. Dre ma tifennas gwirioù an abati enep uhelidi ar vro e voe harluet war un enezenn eus ar Roen lec'h ma varvas en dienez.
- War-dro 767, sant Emilion pe Milion (Lt. Emilianus), penitiour. Ganet e Gwened, e voe da gentañ pirc'hirin kent mont e manati Saujon e-kichen Saintes bet diazezet gant sant Varzhin. C'hoant gentañ bevañ en digenvez e savas e beniti en Ascumbas e-kichen an Dordogn lec'h m'emañ hiziv kêr Saint-Emilion nepell diouzh Bourdel.
- E 1835, e Sant-Yagu-ar-Bineg nepell diouzh Alaer en eskobiezh Gwened, tremenvan ar bac'hia-dez Anjelica Le Sourd, diazevourez Kongregadur C'hoarezed ar Galon-Sakr.

## D'ar 17 a viz Du

- War-dro ar bloaz a c'hras 270, ganedigezh en neñvoù sant Gregor ar Burzhudour, eskob Neokaezarea e Kappadokea. Bez' e voe skoliad Orijen a-raok en em dennañ ur pennadig er gouelec'h. Distro d'e vro e voe anvet eskob war-dro 238 hag dre e abostolerezh e c'hounezas ar vro d'ar C'Hrist. E-pad heskinadeg Decius e tivizas chom kuzhet er vro evit skoazellañ ar re wanañ er feiz. Pa ehanas e rankas talañ ouzh un darreuziad bosenn ha da c'houde ouzh un aloubadeg Goted. E senez Antiokeia e tifennas ar reizhkredenn enep tagadennoù Paol a Samosata.
- E 453, dsitro da Zoue ene sant Aignan, eskob Orleañs. O lakaat e fiziañs e Doue hepken gant pedennoù ha dareoù e c'honzas e vefe dieubet ar gêr diouzh sezi an Huned.
- E 680, santez Hilda a Whitby, abadez kentañ Withby. Nizez-vihan sant Edwin roue Norzumbria, bet badezet ha kenteliet gant sant Paolin York ez eas kerkent hag he fevarzek bloaz da gemer gouel ar gwerc'hez en abati Chelles e Bro-C'Hall lec'h ma oa endeo he c'hoar. Da c'houde ez eas d'ur manati bihan war ribl ar Wear a heulie reolenn Iona kent dont da vezañ abadez abati daouel Heretu e Bro-Saoz. Da c'houde e tiazezas abati daouel Withby a roas pemp eskob en o zouez sant Yann Beverley.
- E 1200, sant Hug a Avalon, eskob Lincoln e Bro-Saoz. Ganet e-kichen Pontcharra e Bro-Arvern, en un tiegezh uhelidi, ez eas da vanac'h er Chartrouzi Vras. Diuzet da eskob e Bro-Saoz, e voe ur bugul difaezhus o terc'hel d'e vuhez a binijenn hag o tasparzhañ e holl leveoù d'ar beorion.
- E 1231, distro da Zoue santez Elisabed Hungaria, merc'h ar roue, dimezet gant Loeiz IV dug

Turinga, mamm tri bugel. Gant he gwaz e klaskas buheziñ an uhelvennad frañsezat. Intañvezet ken abred hag he ugent bloaz e ouestlas he buhez da servij ar beorion hag e varvas d'he 24 bloaz o prederiañ ar glañvourion en ospital Marbourg he doa diazezet.

- E Breizh, er VIvet kantved, santez Tegfedd, c'hoar sant Tedec'ho, ganet en Arvorig hervez buhez sant Padarn.

- E 560, sant Conindrius enez Vanav, eskob war enez Vanav war-lerc'h sant German. Mervel a reas kozh-kenañ.

### D'an 18 a viz Du

- Dedi brientilizoù Sant-Pêr ha Sant-Paol e Roma. An hini gentañ zo bet savet gant an impalaer Kustentin war dorgenn ar Vatikan a-us da vez an hini en doa ar C'hrist fiziet ennañ e Iliz. Deuet da vezañ dirapar e voe adsavet hervez un tres meurdezus ha dediet en-dro gant ar pab Urban VIII d'an 18 a viz Du 1626. An eil, war bez Abostol ar Broadoù, a voe savet war hent Osti gant an impalaered Theodoz ha Valentinian. Dêvet gant un tan-gwall mantrus e 1823 eo bet adsavet kaer ha dediet en-dro d'an 10 a viz Kerzu 1854.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Maodez, abad iwerzhonat, kelenner sant Tudi ha sant Bodvael, penitiour e Sant-Mawes e Kernev-Veur, e Lanvaodez hag en enez Vaodez e Breizh. Goude sant Erwan, n'eus ket ur sant a vefe brudetoc'h eget sant Maodez pe "sant Vaodez" e Breizh. Kontañ a reer un 60 bennak a chapelioù bet gouestlet dezhañ er vro.

### D'an 19 a viz Du

- Er bloaz a c'hras 700, ganedigezh en neñvoù santez Ermenburg, abadez. Gwreg Marewald roue an Angled e voe mamm ar santezed Mildred, Milburg ha Milgit. Goude marv he gwaz e tiazegas un abati lec'h m'emañ Ebbesfleet hiziv.

- War-dro 1298, distro da zoue ene santez Mechtild Helfta, manac'hez en Alamagn. Ganet en un tiegezh uhelidi e voe fiziet en he c'hoar abadez kisterkiat evit bezañ desavet en abati. Deuet da vezañ mestrez ar c'heur e voe santez Gertruda e-touez e skoliadezed. Skrivañ a reas Levr ar radoù, frouezh he buhez kevrinel, hag he devoe gwelidigezhioù Kalon Jezuz.

- E 1907, e Wadowice e Polonia, sant Rafael a Sant-Jozef (Jozef Kalinowski), beleg, lean karmezat. Bez' e oa anezhañ ur Polonad kar-e-vro. Kemer a reas perzh en emsavadeg 1863 a-enep an Tsar hag e voe hangaset da Siberia. Aet da lean er C'Harmez e kemeras an anv Rafael a Sant-Jozef. Adsevel a reas rannbarzh polonat ar C'Harmez hag e voe lesanvet « merzher ar gador-gofes » dre ma tremene kalz amzer o reiñ sakramant an adunaniñ. Gwenvidikaet ha santelezet eo bet gant e genvroad ar pab Yann-Baol II.

- E Breizh, e 594, sant Tangi, abad diazezeur manati ar Releg hag abati Lokmazhev. Mont a reas da benitiour e Bazh hag en Draened goude bezañ lazhet e c'hoar Eodez, touellet ma oa bet gant o lezvamm. Gant sant Paul Aorelian e voe kemmet e anv Gourgi e Tangi.

- En Iwerzhon, sant Aoldobhar ha sant Eascon, menec'h.

### D'an 20 a viz Du

- E 389, distro da Zoue sant Apotem (Gl. Apothème), eskob Anjev. Genidik eus Bro-C'Hres, e oa deuet d'en em santelaat dindan renrerezh sant Varzhin.

- Er bloaz 870, e Thetford en Norfolk, sant Edmond, merzher, roue diwezhañ Saoz ar Reter kent ma vefe aloubet ar rouantelezh gant an Normaned. E relegoù a veze miret e Bury St Edmund.

- E 1922 e Veroli el Latium, ar wenvidigezh Maria-Fortunata Viti, gwerc'hez, manac'hez beneadat. Tremena a reas hogos he buhez a-bezh oc'h ober war-dro lienerezh ar manati aketus da heuliañ gant karantez reizhoù ar reolenn.

- Er Vvet kantved, merzherenti santez Mesant (Gl. Maxence), Skosadez, penitiourez e Pikardia, drouklazhet gant he zad he adkavas e kichen Senlis.

- E Kernev-Veur, sant Uvel pe Eval, eskob.
- War enez Vreizh (Kembre), sant Elwin, manac'h.

### D'an 21 a viz Du

- Gouel an Itron Varia kinniget en Templ. Rakdibabet gant Doue evit dont da vezañ "templ bev Doue", en em ouestlas ar Werc'hez Vari da Zoue abred-tre en Templ. Degaset e voe eno gant he zud santez Anna ha sant Yoakim evel ma vez danevellet e Proto-Aviel Sant Jakez. A-raok an amzer eta e reas Maria an tri le, oc'h en em ginnig a-bezh da Zoue, korf hag ene.
- Er Iañ kantved, distro da Zoue sant Rufus, diskibl an abostol sant Paol, meneget gantañ evel « dibanet gant an Aotrou » en e lizher d'ar Romaned (16,13) . Krediñ a reer e vefe unan eus mibion Simon Kurena (S.o Mk 15,21) .
- E 496, e Roma, ganedigezh en enñvoù, sant Jelaz I añ , pab. Genidik eus Kabilia en Afrika ne voe eskob Roma nemet pevar bloaz hogen e voe a-bouez e gelennadurezh pergen a-zivout ar pec'hed orin, daou hennad denel ha doueel ar C'hrist, kentelezh ar Sez Abostolek.
- E mervent enez Vreizh, er Vvet kantved, sant Digain, feizvonnour, abostolour ar feiz e Kernev-Veur hag e kreizteiz Bro-Gembre lec'h ma tiazegas iliz Llangernyw e kentelezh Conwy. Tiern e oa e Kernev-Veur ha lavaret e vez zoken e oa mab an impalaer Kustentin.

### D'an 22 a viz Du

- Er Iañ kantved, merzherenti sant Filemon, diskibl an abostol sant Paol. Hag eñ annezad pinvidik eus kêr Kolos e roas bod en e di da gumuniezh kristen kentañ ar gêr-se a voe renet gant e vab sant Arc'hippoz. Sant Paol, karc'hariet e Roma, a skrivas ul lizher da Filemon ma c'houlenn outañ reiñ degemer mat da Onezim e sklavour tec'het, bet kanttroet gant an Abostol. Hervez lod e voe labezet Filemon a-gevret gant e wreg santez Appia.
- War-dro 230, e Roma, merzherenti santez Sesilia, gwerc'hez, Paeronez ar sonourion hag ar ganerion ez eo dre ma kane en he c'halon, gouez d'he Fasion, ur ganaouenn diastal da Jezuz he fried, endra m'edod o seniñ sonioù pagan tro-dro dezhi. Hervez an hengoun e oa kefriset gant un den yaouank anvet Valerian a voe gounezet drezi d'ar feiz kristen. O vezañ ma nac'hjont kehelañ an arrizoù roman e voent merzheriet a-gevret gant Tiburs, breur kaer Sesilia. Adalek an Henamzer eo gouestlet un iliz en Trastevere e Roma d'ar verzherez hag e vez kehelet he bez e bered Sant-Kalist war ar Via Appia lec'h m'he deus bet ar bri da vezañ sebeliet e-touez ar bibion.
- E 1927, e Bro-vMec'hiko, merzherenti sant Pedro Esqueda Ramirez, beleg. Gouestlet da gatekizañ ar vugale e kendalc'has gant e wazerezh da vare heskinadeg an Iliz. Harzet ha jahinet e-doug meur a zevezh e voe fuzuilhet nepell diouzh Teocaltitlan.
- E mervent enez Vreizh (Kembre), er bloaz 621, sant Deniel ar Yaouank (pe Deniol), abad Bangor. Gwelout a reas e gumuniezh lazhadeget gant ar roue Ethelfried e 616.

